

YF_0059_Maen ha kleier ma bro

Galv

Salud dit te plac'h (paotr) ma bro, merc'h (mab) ar brug hag al lan
Ni 'zo vont, setu hon zro, da gregin gant ar c'han.

Ur son nevez gompozet, ni zo vont da ganan
Evit didual kalon, an holl re 'zo aman.

Ni hon-daou, zo deuet aman, evel kalz a re all
Hag a gav o 'flijadur, en ur ganan, en ur zansal.

Deuet timat, kozh ha yaouank, deuet timat 'barzh an dans
Hastit da gemer ho plas, ni zo prest da gomans.

Tamm kentan

Deomp breman 'ta mignoned, d'ober un dro bale
Betek kaeran bro, me sonj, en-deus krouet Doue.

Betek korn bro Breizh-Izel e-lec'h ma z'on ganet
E-lec'h ma 'man ma ziegezh, kerent ha mignoned.

War du sav-heol bro Gerne, 'tre Treger ha Gouelou
E-lec'h ma 'n deus an Are, lod eus e veneziou.

Aze 'man bro ar c'herreg, taoliou maen, peulvanou
Savet ha n'ouzer penaos, gwechall gand hon tadou

Ya, piou lavaro penaos, evid piou, ha evid petra
A zo bet lakaet e Breizh, maen ken bras en o sav.

Aze 'man livenn-gein Breizh, aze sko he c'halon
He gwad a red er steriou, e fons pep traonienn don.

Douriou tu an hanternoz, a red betek Mor-Breizh
Ha betek an Atlantel, ez a re ar c'hreisteiz.

E bourk Sant-Jili-Plijo, pintet war e grec'henn
Kemeromp hent Bourk-Kintin, ul lev, netra ouzhpenn.

Ur pleg hent ha setu ni, tost da veg ar menez
Korn ur park; en tu dehou, ur peulvan 'zo aze.

Ha diouzhtu goude heman, unan all 'zo aze
Med war e benn, sanket mat, ur groaz a zo lakaet.

Tamm kreiz

Pa zigouezh tost da fin ar goanv
E klever an drask o kanan

Diskan
Hir eo ar goanv e Breizh-Izel
Krojet dindan yender e vantell.
Met dihun 'ta breman ma bro
Setu an drask o tont en-dro.

Hir eo ar goanv d'al laboused
Pa n'o deus na tommder, na boued.

Breizh a zo lezet a goste
Gant dismegans he bugale.

Ar yaouankiz dianaouek

Troet he 'fenn gant ar galleg.

En ilizou ger ebet ken
Skarzhet kuit gant ar veleien.

Breman e Breizh ne vez prizet
'Met giz an Amerikaned.

Notenn: an diskan 'vez kerneret pep gwech

Tamm diwezhan

Pignomp breman mar karit, betek troad ar roc'h vre
Savet e-kreiz al lanneg, ha saludomp ar groaz

Setu saludet ganeomp kroaz Jezus Mab Doue
Troomp kein breman d'ar maen, ha saludomp Kerne.

Eus an tu all da Gemper, betek harziou Kintin
En em led war douar Breizh, bro gaer Sant-Kaourantin.

Sant-Kaourantin e Kerne, a zo Tad ha Patron
Eskob bras ha kofezour, o Sant ker d'am c'halon.

E pep bro eus Breizh-Izel, ur Sant a zo Patron
Sant-Kaourantin e Kerne, ha Sant Pol e Leon.

E Landreger Sant-Tual, war glannou ar Yodi
'Vit gwelloc'h pedin Doue, savas e vanati.

(Yodi = la rivière Jaudy)

Sant-Brieg e Gouelou, ha pelloc'h Sant-Malo
D'o eskopti 'deus roet, 'vit dalc'hmat o ano.

Sant-Samson 'n'eus e Bro Dol, prezeget komz Doue
Dol, Kerbenn vras Breizh-Izel, dindan Nevenoe.